

barhonegeu **Job er Gléan** (Le Bayon Pleuwigner 1876 – Kolpo 1935)
E gwenedeg. Modernnaet eo bet an doare-skriva

Amzer er heneu¹

Frañsez

Kleùet e hrez er hoed en ined e kanein,
Hag int e lar dem om garein
El deze d'en neùé-hañv,
Rag p'en-da e gouiañ
Yen e kaver er galon dinerrañ.

Mari

En ined er hoedeu e gan eid meulein Doue,
Hag eid o nehiadeu eùé ;
Int e lar o sonenn,
El ur vamm pe luchenn²
He hroèdurig koukset er havèl gwenn.

Frañsez

A ! deit enta, men dous, disul, de geneuad,
Ha me 'yey-me de jiboead ;
Ha ni 'yey on-deu
Idan er bod keneu
Aveid lared douisg on duréréieu³.

Mari

O nepas ! nen dein ket⁴, disul, de geneuad
D'er sul eh eer de baterad,
Ha pe sono er hloh,
Frañsez, me 'yey kentoh
D'en iliz de bédein Doue aveidoh.

Frañsez

M'ho heuillo, men dous, d'en overenn vintin.
Hag e-tal deoh, àr men deulin,
Me 'laro me fedenn
E-pad en overenn,
Boud ma padfé pedèr hag ohpenn.

Mari

D'en overenn-vintin, kerhet, Frañsez, kerhet ;
Mez aveidon-me nen dein ket,
Rag d'er sul ema red
Mond d'en overenn-bred
Aveid cheleu er prédeg benniget.

¹ er heneu : ar hraoñ-kelvez.

² luchenn : lusk, luskell.

³ duréréieu : doareou.

⁴ nen dein ket : n'in ket.

Frañsez

A ! m'ho kortey, men dous ; hag, àr-lerh me merenn,
Me gemero me fuzulienn,
Ha ni e yey on-deu
De vale ér parkeu
Eid redeg er had ha cherrein keneu.

Mari

Nepas, kenderv Frañsez, nen dien ket d'er parkeu,
Mez, pe sono er gouspereu,
D'en iliz me 'yey hoah ;
Ha n'en det ket d'em hlah,
Pe en dud e grede eh oh manah.

Frañsez

Den ebed a-benn dein, àr-lerh er gouspereu,
Ha ni e gavo hoah keneu,
Eid lanein ho tanter⁵,
Men dous, e berr amzer ;
Ha, kent en noz, e vem on-deu er gêr.

Mari

Kollein e ret, Frañsez, ho poan hag ho komzeu ;
Nen dein biskoah de glah keneu,
Ged den yaouank erbed,
Ma ne vem dimezet :
Rag er person en-deus hañ dihuennet !

⁵ Eid lanein ho tanter : evid leunia ho tavañjer.